

# NIDIAD

Priz : 5.00€

“  
með lögum skal land  
vårt bygja  
en eigi með ólögum eyða”



## Pennad-stur

### *Kelc'hiad*

Ur bazenn gentañ bet skoet war an traezh. Ur roud kentañ da dresañ ar c'helc'h.

Kleuziet hon eus, don ouzh don, pell ouzh pell... ha setu ni degouezhet e penn an tres. E penn an traezh.

Met en tu all d'an traezh, ne gavomp nemet an tres kentañ-se : an hini bet treset ganimp, en deroù.

Ha roud ebet eus ar mor.

Rak ar mor eo a dizhemp, eñ eo a vennemp diraez. Hogen neblec'h n'hon eus e gavet. Neblec'h n'hon eus gallet gibellañ ennañ, nag evañ eus e zour holenek.

Met un dra all hon eus graet : en dro d'ar c'helc'h bet savet war an traezh, tud. Tud yaouank ha kozh, tud pinvidik ha paour, tud speredek ha droch, tud.

Ha n'eo ket an traezh ken a zo ar c'helc'h : ni eo.

Ha bremañ ez a an eil da gemer dorn egile. A bep tu dimp, froud ar mor, e son, ar blaz anezhañ ; c'hwezh an avel, krioù an evned. C'hwezh an avel, taol an heol.

Hag ar c'helc'hiad tud a grog da dreiñ. Kroget an abadenn.

Nidiad

### *Trugarez da :*

Guy Étienne, Lucie Galvani, Yann Mikael

Meneg dibarek d'hon holl lennerion

An niverenn-mañ a vennomp dediañ  
d'hon c'heneilez Marion Poilvez

### *Strollad Skridaozerezh*

Malo Adeux  
Fabrig Coupechoux  
Gwendal Piégais

## Krennva

### I. Barzhonegoù

*Ar C'haier*..... P.5

*Araozomp edomp amañ*..... P.7

### II. Spered Plaen

*A-zivout an niverenn diwezhañ*..... P.9

*Urbanitates Odini : divezelezh an Uhel*..... P.11

*Karantez ha keneilded e Njåls saga*..... P.19

*Harrison Bergeron*..... P.26

### III. Prederouriezh

*Un eskemm lizhiri*..... P.30

Goloenn : Lucie Galvani  
Pajennaazañ : Gweneg Ar C'haer

## Barzhonegoù Ar C'haier

Biskoazh ne 'm eus skrivet  
War ar c'haier delioù  
Er paper siellet el lin.

E follennoù gwenn kan  
Zo dalc'het start  
En un dornad tomm.

Biskoazh ne 'm eus kredet  
E veuziñ e takadoù  
Pluennoù ha livioù.

Va unan edon dirazañ.  
An nor oa chomet digor.  
Prenn ebet en noz  
Prenn nemet enkloz.

Gortoz 'ta, a emlavaren  
N'eo ket erruet ar veajourez  
Dont a ray un deiz  
Dre hent, dor ha c'hoarzh.

Erruout a ray  
Gant he fazennoù sioul  
War seulioù lin  
Dre ganolioù hen.

Ha dont a ray ?  
A c'houlenne ar c'heneil.  
Evezhiañ a ra ar redenn  
Ar mor hag ar regez.

Ha dont a ray ?  
A glemme mouezh an eil.

Ha dont a reas  
 War seulioù lin  
 Gant komzoù dous  
 Ha joa an eil.

Gwendal Piégais

## Araozomp edomp amañ

Emañ hon tamm douar patatez  
 O treiñ o treiñ o treiñ  
 Warni ez eus ganet  
 E-touez meur a voud  
 Re o deus un eñvor,  
 Ur c'houn.

Reoù a vev aze, re all a vev amañ  
 War un douar.  
 Dezho ur c'houn un douar ur meizerezh  
 O hini.  
 N'int ket gwelloc'h n'int ket gwashoc'h  
 'Get ar re all.  
 Int zo pezh ez int  
 Ha setu holl.

Deiz ha noz o deus labouret  
 Dizehan o deus treuzvevet  
 Hag a-hed ar remziadoù  
 O deus treuzkaset.

Me zo eus o gouenn  
 Me zo eus o gwad  
 Me zo eus o spered

Ni zo eus o yezh  
 Ni zo eus o c'houn  
 Hag eus o meizerezh

Ni zo pezh ez int bet  
 Int zo pezh e vefomp.

Hag o terc'hel gant o erv,  
 O kerzhout war o hent  
 E harzin a vezañ spontet  
 Gant ar marv  
 O terc'hel soñj eus se :

Araozomp edont amañ  
 War o lerc'h e vimp amañ  
 Drezo edomp amañ a-raok  
 Ha dre ar re a zeuy da heul  
 E vimp amañ da virviken  
 Rak war hon lerc'h e vimp amañ  
 Kement hag ez omp bepred bet  
 A holl viskoazh.

D'ar re a arvar  
 Oslo, d'ar 5 Du 2014  
 Malo Adeux

## Spered Plaen

### A-zivout an niverenn diwezhañ

Lennerion ger,

Un nebeud resisadennoù a rae diouer e pennadoù an niverenn eitek (Ebril 2014) : talvezet ez eus bet dimp gant un nebeud ac'hanoc'h hor boa manket erouezañ div droidigezh, hini « Jean Benvoar » gant Saint-Loup ha hini « Teir frezegenn a-zivout aoz ar re Vras » gant Blaise Pascale, pezh a gase treuzintentoù bennak. Hag e gwirionez hor bije ranket lakaat e diagent pep hini ur pennad o tisplegañ endalc'had pep testenn hag ouzh o adlakaat en o amveziadur.

Anat eo enta e vo hiviziken diaraoget pep troidigezh gant un displegadenn berr ha resis. Anat eo ivez ne vo ket graet se evit ar barzhonegoù nag an testennoù lennegel, nemet e vent embannet evit abegoù istorel, se evit un abeg splann ez eo hini ar bourrañ lennegel hep ledtestenn dreistezhomm.

Un hanter erouezadur oa bet graet evit « Jean Benvoar » met hini ebet evit testenn Pascal. Klokaat a raimp enta labour an droerion o kregiñ gant an destenn gentañ, da heul o kinnig un displegadenn a-bezh evit an eil.

« Jean Benvoar » a gaver el levr *Les Nostalgiques*, bet skrivet gant Saint-Loup e 1967, embannet e galleg gant ar Presses de la Cité. An oberenn-se, emvuheziadurel, a gont eñvorennoù an aozer eus ar brezel 1939-1945 ha dazoned un nebeud perzhidi emouestlet gant an arme alaman. Daou arvez oa da embann un destenn a seurt-se : unan istorel hag unan prederourel. Istorel rak ma terc'henn un aergelc'h eus ar mare, un daolenn eus ar brezel gant unan en doa e vuhez. Evel skridoù perzhidi all e tiskouez dimp un tañva eus al labour adskrivañ un istor, un emistor, a chom c'hoazh da elfennañ ha da brederiañ evel ma voe graet gant diaraogerion 'zo, peurgetket Henri Guillemin, Jean-Luc Évard pe Stéphane Audioin-Rouzeau. Prederourel ivez dre ma tiskouez dimp ur skeudenn eus arver an haroz e kevredigezhioù merket gant ar brezel hag ar c'healiadurezhioù gwadek. Ur prenestr eo an destenn-mañ, ur *jalousie* o reiñ dimp da barañ hon sell war ur bed aet da get, disheñvel, amgen a-grenn, a arc'hwele gant argeloù, arouezioù ha talvoudoù disheñvel, a boaniomp da gompren hiziv c'hoazh. Se a vennemp ober ; digarezit ni m'eo bet meizet en un doare all.

Embannet hon eus un droidigezh eus ar skrid « Teir frezegenn a-zivout aoz ar re Vras ». E dibenn an destenn hon eus lakaet sinadur ar prederour gall Blaise Pascal. Un hanter wirionez e oa avat : an destenn-se zo frouezh eus an eskemmoù etre

Pascal hag ur prederour jansenour anvet Nicole. Klasket en deus lakaat dre skrid, goude marv Pascal, tenor ar prederiadennoù bet kaset gantañ diwar-benn dodennoù politikel. Gouzout a ouzer ez eus bet dalc'het an kez eskemmoù war-dro 1660. Ha sur a-walc'h eo merk Pascal a gaver war an destenn a-drugarez d'ar meizad a garitez, ar meizad-se o vezañ an alc'houez rekis da bep hini a venn kompren an nebeud a skridoù bet savet gant Pascal o sellout ouzh politikouriezh.

O tennañ splot ha korvo eus hon diampartiz, e kavot bremañ e *Nidiad* un displegadenn resis ha spis evit pep testenñ istorel pe prederour. Evit a sell pennadoù pe testennoù troet war-du kudennadurioù istorel e kementomp ganedigezh ur rummad nevez a zeraouo e penn kentañ ar bloavezh 2015 hag a vo anvet « Koun hag Istor ». Gant ar spi e kavot ho peadra en danvez a ginnigimp gantañ, evel ma spiomp hoc'h eus e gavet en danvez hon eus kinniget deoc'h betek bremañ.

Lenndennoù mat a hetomp deoc'h.

Nidiad

## Urbanitates Odini: divezelezh an Uhel

E-touez testennoù ar *Codex Regius*, un dornskrid ennañ ur c'horfad testennoù poetek a anver ar varzhoniezh eddek<sup>1</sup>, e oa *Hávamál* an hini gentañ o vezañ troet hag embannet, a-gevret gant ar barzhoneg *Völuspá*, a gont istor krouidigezh ar bed ha diougan e zistrujidigezh hervez ar Skandinaviz rakkristen. Embannet e voe e latin e 1665 gant Peder Hansen Resen, maer Kopenhagen ha kelenner war an divezoniezh<sup>2</sup>, dindan an talbenn *Ethica Odini pars Eddae Saemundi vocata Haavamaal*, (« Divezouriezh Óðinn<sup>3</sup>, lodenn eus Edda Sæmundr<sup>4</sup> anvet Hávamál »). Dibab an droienn-mañ, « *Ethica Odini* », na pegen amparfal e hañvalfe bezañ, a van deurus rak ma sav goulenn genad *Hávamál*, peurgetket al lodenn gentañ anezhi, anvet *Gestafáttir*, « Rann ar c'houviad »<sup>6</sup>. Al lodenn vrudetañ eo, anavezet ivez evel hini ar « barzhonegoù gnomek » en abeg d'an hebadelloù gwerzaouet a c'hoarvez anezho, pep hini o kinnig ur c'huzul pe meur a hini d'an den pedet en un ti, ur gouel pe e forzh peseurt amveziadur kevredadel.

Un destenn emren ha kevanstag en he un ez eus eus *Gestafáttir*, en he framm kement hag en he endalc'hed<sup>7</sup>, tra ma van un tamm kudennusoc'h talvoudegezh gnomek al lodennoù all. Warni e labourimp enta er pennad-mañ ha war ar c'hudennoù a c'henad a sav aze.

En henvoaz lennegel european e vez liammet ar furnez gant an divezelezh. Diouzh ar savboent-se eo e krog genad *Gestafáttir* da vezañ ur gudenn. Ha sellout a

1 Diwar an *Edda* prozaek, skrivet gant Snorri Sturluson war-dro 1220, hag o kentañ istorioù liammet ouzh doueed rakkristen Skandinavia, eo bet anvet ar barzhonegoù a gaver er *Codex Regius*.

2 Barne Fijdestol, *The Dating of Eddic Poetry*, Bibliotheca Arnemagnæana, Copenhagen, 1999, Lodenn gentañ, II « Scholarly Prehistory », p. 13-15.

3 *Ethica Odini pars Eddae Saemundi vocata Haavamaal, unā cum ejusdem appendice appellato Runa capitule, à multis exopata nunc tandem Islandicè & Latine in lucem producta est per Petrum Joh. Resenium.*

4 Er pennad-mañ e talc'himp gant anv orinel doueed pagan Skandinavia. An arouez « ð » en « Óðinn » (anavezet en hon bro evel « Odin ») a vez distaget evel an « th » er saozneg *this*.

5 Sæmundr fróði (Sæmundr ar gouizieg), unan eus eus skrivagnerion c'hallus testennoù ar CR.

6 An arouez « þ » a vez distaget evel er saozneg *thick*.

7 Sl. John McKinell, « The Making of Hávamál », in *Viking and Medieval Scandinavia*, Levrenn 3, 2007, p. 106-109. Gant an hevelep aozer, sl. ivez « Personae of the performer in Hávamál », in *Saga-Book*, Vol. XXXVII, Viking Society for Northern Research, University College, London, 2013, p. 28.

c'haller *Hávamál* dre vras. *Gestaþátrr* ent dibarek, evel ur c'hevatal norrek<sup>8</sup> eus pezh a anavezet en Europa evel divezel abaoe mare Henc'hres ? Ha ma n'eo ket, pe zoare furnez eo ez eus roet dimp amañ ? Ha dereout a rafe hevelep furnez d'hon meizerezh modern a 'n divezelezh pe ha henstuzel e rank bezañ sellet evel ar barzhonegoù all o komz diwar-benn an doueed ? Pe zarempred a gaver etre an destenn-se ha pezh a sellomp evel divezel ? Ha pe zitour a c'hell hi reiñ dimp a-zivout an doare ma veze meizet an divezelezh gant an Norreidi ? An holl atersoù-se a c'hell bezañ diverret e hemañ : goulenn an darempred en deus *Hávamál* ouzh an divezel.

A-benn respont d'an aters-se ez emgreizimp da gentañ *var* un despizadur a 'n divezelezh hag ez emc'houlennimp pegen tost eo *Gestaþátrr* d'ea hevelep despizadur ; da eil e tezzannimp spesadelezh an destenn-se evit a sell ar furnez kinniget ganti, an dodennoù hag al luskedoù anezhi ; erziwezh e sellimp a dostoc'h ouzh pal an destenn, pegen he fal diskouez dimp ur « Viking gentleman », un hevelep skeudenn o vezañ dispaket a-hed *Gestaþátrr* hag a zo roet da gendodiñ he frezeg *avvezi* d'al lenner.

Evel m'hon eus e lavaret endeo ne emgreizimp nemet *var* *Gestaþátrr*, se evit ar pennabegoù da heul : 1) ar verrded a vennomp mirout a-benn ma vano fraezh ha sklaer hon arhebad, 2) gnomegezh strizh al lodenn-se nad eo ket ken splann er re all, evel troioù kaer Óðinn, *Rúnatal*, a-zivout ar runoù, pe *Ljóðatal*, a-zivout ar strobinoù. Heuliañ a reomp ar rannadur bet graet gant John McKinnell en e bennad diwar-benn framm *Hávamál* ma respiz ar « Barzhoneg gnomek » (*Gnomic Poem*) o vont eus ar poz 1 da 79<sup>9</sup>.

Pa soñjer en divezel, e vez prederouriezh Henc'hres an dra gentañ a soñjer enni. Amkan an divezoniezh, evel m'he despiz Aristoteles en *Ethika Nikomakheia*, eo ar vuhez vat, pe « spered mat » (*eudaimonia*), a gлот gant an eurvad (*Ethika Nikomakheia*, §21, 1095a15-22) hag a zo ar gwellañ mad a c'hell hag a rank an denion diraez. Un hentenn eo ivez an divezoniezh avat, hini ar brederouriezh pleustrek a zo ur brederi filozofel, un imboure'h a-zivout an doare gouzout pezh a zo mat ha fall, ha penaos diraez pezh a zo mat. Hevelep hentenn a gaver a-hed hengoun prederourel Europa gant an hevelep ematers : petra eo un ober mat ? Petra eo un emzalc'h mat ? Penaos e c'houzout hag e ziraez ? Pleustrek eo en abeg d'ar gwered eeun war buhez mab den ha dre m'eo an emzalc'h mat he fal e c'haller komz a *imboure'h reoliñ*, eleze un devez kefreddel sañset kas d'un nebeud reolennoù arveret en un amveziadur pleustrek,

8 Er pennad-mañ e raïmp gant an termen *norrek* (pe *hemnorrek*) da zeskrivañ ur skrid skandinavek a 'r Grennamzer. E norgeeg bremañ e reer gant *norroni* pe *gammelnorsk* (*gammalnorsk* a-wechoù), en islandeg bremañ e reer gant *norræna* pe *forðislenska*. Er yezhoù all, saozneg, alamaneg pe galleg peurgetket e taveer diziforc'h d'an norzh pe da Island (nebeutoc'h alies da Norge). *Norreg* (pe *hemnorreg*) eo enta ar yezh a gomze an *Norreidi*, pe : *henislandeg/hennorgeeg* eo a veze komzet gant *Henislandiz/Hennorgeiz*, a oa en orin ur bobl hepken ganti ur yezh hepken, a yafe diwezhatoc'h da vezañ rannet war-dro ar XV<sup>vet</sup> kantved.

9 John McKinnell, « The Making of *Hávamál* », art. cit.

en eneb d'un *imboure'h deskrivadurel*, hemañ o vezañ domani ar brederouriezh damkanel<sup>10</sup>.

O lenn *Gestaþátrr* e c'hallfemp enta soñjal en un nester gant an hengoun henc'hresian-european-mañ. E devoud, an hentenn a gaver en destenn hennorrek n'he deus netra da welout gantañ en abeg ma ne sav ket ar goulenn diwar-benn pezh a zo mat pe fall. Sellomp ouzh ur poz :

Hinn vari gestr	Ar c'houviad evezhiek
er til verðar kœmr	a zo deuet d'ar pred
þunnu hljóði þegir	a dav, e skouarn danav;
eyrum hlýðir	e zivskouarn a selaou,
en augum skoðar	e zaoulagad a sell :
svá fróðra hverr fyrir.	evel henn e klask penn pep den fur. (7) <sup>11</sup>

Amañ ez eus deskrivet dimp pezh a vez graet gant ur c'houviad evezhiek rizhek (e rizhegezh o vezañ arbouezet gant ar ger mell strizh *himn*, oc'h ober ur c'houviad skouer anezhañ) da geñver ur pred (*verðar*) ha penaos ez emzitour en un doare fur (*fróðra hverr fyrir*). Imboure'h ebet a-zivout an emzalc'h mat gwir ; prepoz an destenn ned eo nemet penaos emzerc'hel, an emzalc'h o vezañ kinniget neket evel ur goulenn da sevel hogen evel un dezveg da zeskiñ.

Patromoù lennegel all a ranker kavout enta e-maez ar pleustradoù divezoniezh evit keñveriañ. Al lennegezh vuhezegour e Frañs ha Saoz er XVII<sup>vet</sup> kantved oc'h emgreizañ war ar c'hendivizadoù kevredigezhel ne gлот ket kennebeut rak m'eo deuriotoc'h gant an aters eget gant ar reolennoù emzerc'hel. Carolyne Larrington a gomz diwar-benn ul liamm etre *Hávamál* ha testennoù gnomek all evel ar barzhonegoù furnez hensaozneg pe *Erga kai Hémerai* (« Labourioù ha Deizioù ») gant Hésiodos. E devoud e klot, ouzhpenn dre an danvez hogen kenkoulz dre ar furm, evel m'en diskouez en he fennad diwar-benn ar goulenn-se :

Evel gwerzioù furnez all, e rann *Hávamál* dezverkoù genadel ar gestouegezh hag an diorblidigezh [...]. Peogwir n'eo ket rediet ur barzhoneg furnez gant kemmennadurioù

10 Amañ emañ an diforc'h en oberenn Immanuel Kant etre *Kritik der reinen Vernunft* (prederouriezh damkanel, devezout deskrivadurel) ha *Kritik der praktischen Vernunft* (prederouriezh pleustek, devezout reoliñ). Levri Gilles Deleuze, *La philosophie critique de Kant* (1963), a zispleg mat an diforc'h etre an daou zomani. Ur skouer all eo an diforc'h etre yezhoniezh deskrivadurel (pe *yezhadur*) ha yezhoniezh reoliñ (pe *gramadeg* ; lenn kentskrid *Gramadeg ar Verb* (Preder, 2010) diwar-benn an diforc'h diwezhañ-mañ).

11 Holl arroudoù *Hávamál* zo kemeret eus embannadur David Evans ha troet ganin ha Marion Poil-vez.

poell an dezrevell pe an adegadur, skridaozerion hevelep barzhonegoù a enkore alies danvez n'en deus ket a liamm enien gant divoud ar breud diaraok.<sup>12</sup>

N'eo ket liammet *Gestapátrr* gant forzh peseurt argeziad filozofel rak na c'hoarvez eus imbours'h ebet, pezh en liamm tostoc'h da henvoazioù gnomek ar bed holl. Kentoc'h eget un *divezoniezh*, un *divezelezh* eo a zo kinniget dimp amañ.

Hevelep perzhouelezh en henvoaz ledanoc'h-se ne vir ket ouzh an destenn-se da vezañ ganti un nebeud dibaregezhioù pe pouezioù na c'hallfer ket kavout e testennoù gnomek all. Ur spesadelezh eus *Gestapátrr* eo avat pouezusted an hañvalout hag emgreiziañ a ra gant nerzh war ar c'hraf-se. Kemeromp ur skouer e-touez meur a hini all :

Fróðr þykkisk sá er flótta tekr gestr at gest hæðinn veita gørla sá er of verði glissir þótt hann með grómum glami	Fur e soñj dezhañ bezañ ar c'houviad a c'hoap ar c'houviad hag a dec'h ; ne anavez ket moarvat hemañ a vinc'hoarzh e-pad ur pred hag e vrizhc'hoarzh gant un enebour. (31)
---	---

Muioc'h eget arver ar verb *þykkja* « hañvalout » ez eo arbouezet gant eil lodenn ar poz ar rann etre ar c'houviad hag ar werc'helezh kuzh a zo ar c'hallusted emañ o chervadiñ gant enebourion pe tud dañjerus ha heuliadoù embregel an devoud e van ur bern traoù dianav dezhañ. « Ne c'hellez ket gouzout hag e-touez enebourion emañ, serr da veg enta » : pouezusted an hañvalout, anat e forzh petore amveziadur, zo arbouezet kreñv aze.

Pelloc'h ez a *Gestapátrr* zoken rak na erouez furnez diabarzh ebet daoust da c'houezvoud ar « re fur ». Teir gwech e vez meneget ar re-se, evel *snotrum* (5, 24) ha *horskum* (20). Pal ar c'houviad eo bezañ (pe ac'hoel hañvalout bezañ) *fróðr* (28, 30, 31, 63), neket *snotr* pe *horskr*. An daou zezanvadur-se ne hañvalont nemet emarloañ ouzh ar strollad a azez ar c'houviad ganto. Int a ziskouez bezañ anlaezidi kentoc'h eget tud ganto furnez : o « furnez », mar galler envel se evel henn, ned eo ket un dra bennak a c'haller deskiñ dre lenn *Hávamál* dre nad eo ket meneget an diforc'h etre *fróðr*, *snotr* ha *horskr*. Se a ziskouez c'hoazh ned eo ket prepoz an destenn-se gouzout ar wirionez met deskrivañ ur stad a 'n traoù kevredadel. Tudennoù all a c'hell dont

<sup>12</sup> « Like other wisdom verse, *Hávamál* shares the generic characteristics of elasticity and compendiousness [...]. Since a wisdom poem is not constrained by the dictates of narrative logic or chronology, the compilers of such poems often insert material which has no intrinsic connection with the preceding subject of discussion », in Carolyne Larrington, « *Hávamál* and Sources outside Scandinavia », in *Saga-Book*, Levrenn XXIII, Society for Northern Research, University College, London, 1991, p. 141 [brezhoneg ganimp]. Gant an hevelep aozer, sl. ivez *A Store of Common Sense: Gnostic Theme and Style in Old Icelandic and Old English Wisdom Poetry*, Clarendon Press, Oxford, 1993.

war wel e-touez ar re fur (*með horskum koma*, 20 ; *með snotrum sitja*, 24) : an hini diot (*heimskr maðr*) a chom gant ar re fur hep bezañ prenet o furnez (20) hag an den difur (*ósnotr maðr pe ósviðr maðr*) na ra van eus reolennoù an emzalc'h kevredadel (21, 23-37). Enepskouerioù ez eus eus an kez tudennoù hag ar c'houviad a rank hepkoriñ ober evelto. Amañ c'hoazh n'eo ket ar pal hepkoriñ bezañ difur hogen hepkoriñ hañvalout bezañ un den difur evel m'en diskouez dimp ar poz-mañ :

Kópir afglapi er til kynnis kómr þylsk hann umbeða þrumir alt er senn ef hann sylg um getr uppi er þá geð guma	Arsellout a ra ar beulke pa zeu da weladenniñ, grozmolat a ra pe mouzhañ; a-greiz holl mar diskenn ur banne dezhañ, e vez dizoloet enta e demz spered. (17)
---	--

An den diot zoken a c'hell degemer kuzulioù. Se zo pell a vezañ digempeoll mar seller ez eo pouezusoc'h hañvalout eget bezañ. Keit ha ma ne vezer ket sellet evel un den diot, gwerc'helezh pezh ez eur e gwirionez n'eo ket gwall bouezus.

*Gestapátrr* a zeskriver ur bed a gendivizadoù kevredadel kemplezh muioc'h eget un divezouriezh hollvedel (hag alese un divezoniezh). Ne ro ket an alc'houez da vezañ perzhiat ennañ met kentoc'h an alc'houez da glotañ ennañ evel *pa* ver parzhiat ennañ. Tu a ve da gomz eus un *divezouriezh vrientinel* evel hini lezioù meur Europa, Frañs pe Russia da skouer, un *divezouriezh* danzeet e-pad kantvedoù ha kantvedoù ha dic'hallus d'unan o tont eus an diavaez (evel... ur c'houviad) mestroniañ hep meur a vloavezh, pe zoken meur a remziad. Ar reizhiad kemplezh-se a vonekadur a emled a-wechoù pelloc'h zoken eget an emzalc'h mat, er pozioù 36 ha 37 da skouer, o veuliñ an annez (*bú*) :

Bú er betra þótt lítit sé halr er heima hverr [...]	Ur gêr zo gwell, na pegen bihan e ve, pep den a ve unan bennak en e c'hér [...] (36&37)
---	--

Un hevelep skouer a chom kempoell mar mirer lennadur an *divezouriezh vrientinel*, an annez o tiskouez bezañ ur bondalvoud er metoù kevredadel deskrivet dimp gant *Gestapátrr*.

Ken pell ma hañval bezañ diouzh ar brederouriezh pleustrek e ve, divoud *Gestapátrr*, en hevelep doare ha testennoù furnez all, a chom heñvel, eleze hini an emzalc'h mat, daoust m'eo strishaet an kez emzalc'h mat d'un amveziadur resis a zo roet dimp e deroù holl ar barzhoneg :

## Urbanitates Odini: divezelezh an Uhel

Gáttir allar áðr gangi fram um skoðask skyli um skygnask skyli [...]	Pep enkerzh, kent mont tre, a rank bout arsellet, a rank bout evezhiet [...] (1)
---	---

*Gáttir allar* (« pep enkerzh ») : evel un arhent arfraouiñ ez arc'hwel an enkerzh evit ar c'houviad. Evezhie e ranker bout kerkent hag e dremenet. Un abeg anat zo da ezvezañ an imbourc'h : ne brederier ket en doare d'emzerc'hel pa vezer en un amveziadur pleustrek. Amañ ez adkaver un diforc'h etre preder damkanel ha pleustrek, an eil o vezañ en aters kefredel tra ma amkan eñt gwerediñ raktal er vuhez pemdeziek. Pal an destenn eo bezañ lakaet e pleustrek kerkent ha lennet. Skrivagner(ion) *Hávamál* zo anezho mouezh ar re a oar hag a vessoagn ar reolennoù, ma n'eo ket int o unan o deus o skrivet<sup>13</sup>, ha furnez pleustrek eo d'an dudenn-se a zo he roll hañvalout bezañ *fróðr maðr*.

*Gestaþátr*, muioc'h eget bezañ forzh peseurt testenn c'hnomek e korfad gnomek ar bed holl, a ro evel m'en gwelomp, ur savboent dibarek war pezh e rank bezañ an divezel. An endalc'hed anezhañ a arc'hwel e doare ma kinnig dimp skeudenn ur « Viking gentleman ». Ar skeudenn-se an hini eo a zezrannimp bremañ.

Meur a zodenn a zeu war wel en destenn : ar pouezus eo bezañ didrouz (4, 6, 15, 19, 27, 29), hañvalout fur (27, 28, 30, 31, 54-56), emzerc'hel mat pa ever (12-14, 17, 19) pe pa zebrer (20, 21). E liamm ouzh an holl zodennoù-se e c'haller kavout ar pouezus eo chom hep niñvañ (« gwelloc'h chom hep komz eget lavarout traoù diot » 27) pe an disterañ droug (19) hag an dilontegezh. Kempoell eo hañvalout fur en un hevelep aergelc'h divezel, kevredadeloc'h eget hiniennel hag o lakaat ar muzul e kreiz pep emzalc'h mat evel m'en diskouez dimp ar poz-mañ a-zivout an evañ :

Haldit maðr á kerri drekki þó at hófi mjöð mæli þarft eða þegi ókynnis þess var þik engi maðr at þú gangir snemma at sofa	Un den ne rankfe ket bezañ peg en e gib, evañ chouchenn gant poell avat pa vez ret komz, pe devel. Hevelep disevender ne vez rebechet dezhañ gant den, mont da gousket abred. (19)
--	---

Habaskter, muzul, dilontegezh : hevelep reolennoù emzerc'hel a daolenn dimp skeudenn ur « Viking gentleman », kemeret evel skouer evit ar c'houviad. Dont da vezañ un hevelep « gentleman » ne rank ket avat ; hañvalout evel unan ne lavaromp

13 Na zisoñjomp ket e chom Óðinn, a soñjer diwar e benn e oa penn doueed rakkristen Skandinavia, aozer *Hávamál* ent lennegel (sl. John Lindow, *Norse Mythology: A Guide to the Gods, Heroes, Rituals, and Beliefs*, Oxford University Press, Oxford, 2001, pennad « Odin », p. 247-252).

## Urbanitates Odini: divezelezh an Uhel

ket. Ar reizhiad kevredadel a-bezh diskouezet dimp e *Gestaþátr* a zo he fal hañvalout-evel, ha neket bezañ. Ar pouezusted-mañ a 'n hañvalout eo an abeg e komzomp eus un doare « gentleman ». Bez' ez eus ur c'hrennlavar saoz a lavar ez eus « ur gentleman un den a oar seniñ gant ar biniou met n'en gra ket »<sup>14</sup>. En hevelep doare, ar Viking gentleman, m'eo gouest da vont da vezv dall, zo diforc'h pergen dre bareañ an deiz war-lerc'h :

Qlr ek varð varð ofrölvi at hins fróða Fjalars því er þóðr bazt at apr of heimtir hverr sitt geð gumi	Aet on da vezv, Aet da vezv dall e kër Fjalarr ar fur. Ar gwellañ riboul zo anezhañ Pa 'z a pep den da c'houde da adkavout e skiant. (14)
--	--

Ouzhpenn se, evel m'hon eus e welet en a-raok, un divizad eo ar furnez ha bezañ anvet fur zo disoc'h un enhentañ. Se a c'haller liammañ gant tudenn Óðinn dre m'eo eñ sellet evel aozer *Hávamál* ent lennegel. Nepred ne ouzer penaos e pren furnez ; ne ouzer nemet penaos e tarannen en he ferc'henn evel e *Vafþrúðnismál* da skouer, un diviz gwerzaouek dres etre Óðinn hag an doue Frigg. An daranreadenn o tiskouez hag o lakaat e furnez en a-raok zo liammet don ouzh tudenn Óðinn ; n'eo ket souezh enta mard eo kinniget endalc'hed *Gestaþátr* en doare m'eo kinniget hag ez eo liammet don pal ar « Viking gentleman » ouzh ar gravez rakkristen.

An divezouriezh roet en destenn-se a c'hallfe bezañ sellet evel un *divezouriezh en amzer*<sup>15</sup> : an amzer hag an oad hepken a ro furnez gant ma vint arveret mat, dre vejaiñ (an den diot o vezañ anvet *heimsk maðr*, an den a chom er gêr), dre ziskouez emzalc'husted, gallusted pareañ eus ar chervad ha diouer a ziampartiz. Diskouez a ra *Gestaþátr* enta bezañ un oberenn da zerc'hel an hañvaladoù, anez na vezañ ket sellet evel un den fur. Ha n'eo ket en oberenn-se avat e vez roet an hentenn da vezañ sellet evel fur.

En imbourc'h-mañ hon eus gwelet pep tra a ranne furnez *Gestaþátr* diouzh divezoniezh hengounel Europa, homañ diwezhañ o vezañ un aters diwar-benn penaos emzerc'hel mat e buhez an-unan dre arver ar ersell (*frónésis* e yezh Aristoteles) evel un diarbenn da chom hep faziañ e skiantvarn an-unan, tra m'eo pal an destenn norrek hañvalout kompren reolennoù kevredadel na c'hell ket bezañ mestronier gant un den eus an diavaez forzh penaos, se dre ziskouez an nebeutañ a wanded ar gwellañ

14 Ar frazenn a ve digant Oscar Wilde pe tud vrudet all hogen n'eo ket gallus kavout an destenn orin. Hañvalout a ra kentoc'h bezañ ur grennlavarenn pe farsadenn bennak e Breizh Veur.

15 John McKinell « Personae of the performer in *Hávamál* », *art. cit.*, p. 30-32.

e-tal da enebourion c'halloudel. Se a ra eus lodenn gentañ *Hávamál* ur skrid nesoc'h d'un dornlevr eget d'ur pleustrad hag ar prepoz desavadurel anezhañ a zeskriv hag a gas d'un doare skiant voutin brientinel.

E « The Making of *Hávamál* » ez arguzenn McKinell a-enep savboent Klaus von See e ve levezonet *Hávamál* gant *Hugsvinnsmál*, « un azasadenn hennorrek eus delvad kendiñvel an *Disticha Catonis*, un oberenn boblek a guzuliou divezel e gwerzennoù latin »<sup>16</sup>. Klozañ e zezrann a ra o lavarout ar c'hontrol, elze eo tebekoc'h soñjal eo levezonet *Hugsvinnsmál* gant *Hávamál*. E pep lec'h en Europa ez eus bet graet troidigezhioù eus oberenoù o tont eus an Henamzer hag o adzasadet en amveziadoù spesadel o adskrivezh. E giz-se e c'haller gwelout tourelloù e-pad brezel Troja en e droidigezh henc'hallek gant Benoît de Sainte-Maure<sup>17</sup>. En hevelep doare e c'hell tremen azasadur ar furnez latin dre ur sil sevenadurel, amañ an henvoaz gnomek stallet gant *Hávamál*. Mar emañ ar gwir gant McKinell, e talvez se e oa diazezet mat ar c'hendivizadoù kevredadel deskrivet e *Hávamál* er sevenadur norrek hag e oa eus an amveziouriezh vrientinel ur rumm na c'halled ket chom hep soñjal ennañ, zoken en amveziadur adskrivañ un destenn latin.

Daoust nad eo ket kinniget evel kudennus, un dezverk he rann da vat diouzh nep prezeg prederourel, ar pal reoliñ hag imbourc'h ur vuhez vat (nad a ket pelloc'h a-wechoù eget menel bev) a ro d'an destenn an un paliou ha re ar brederouriezh pleustrek. Etre ar prepozioù damkanel ha pleustrek emañ enta an eneberezh. Anat eo ne glote ket an dezanvadur kavet gant an embanner Resen, *Ethica Odini*, gant spered *Hávamál*, ha ne oa ket pal al labour-mañ sellout an diuzad-se evel sirius. Oc'h arverañ an digarez-se en deus hon c'haset da ziwall d'ar skeudenn-mañ a'r « Viking gentleman » eo e c'hallfemp enta kinnig diwar neuze, o ragempentiñ evel henn un droidigezh nevez eus *Hávamál* e latin, an talbenn-mañ : *Urbanitates Odini pars Eddae Saemundi vocata Haavamaal*.

16 « [...] an Old Norse verse adaptation of the Vulgate version of the *Disticha Catonis*, a popular work of moral advice in Latin verse », in McKinell, « The Making... », *art. cit.*, p. 76-91 [brezhoneg ganin]. Un embannadur ez eus bet graet eus *Hugsvinnsmál* gant Birgitta Tuvestrand e 1977.

17 Benoît de Sainte-Maure, *Le Roman de Troie*, troidigezh e galleg Emmanuèle Baumgartner et Françoise Vielliard, Le Livre de Poche, Paris, 1998.

## Karantez ha keneilded e *Njåls saga*

Er bloavezhioù diwezhañ o deus ranket an arbennigourion kemmañ ar sell o doa war *Njåls saga*. Levezon ar *gender studies*, a emgreiz war roll ar reizhoù – benel pe gourel – el lennegezh hag er sevenadur, ha skog bras pennad Ármann Jakobsson « Masculinity and Politics in *Njåls saga* » o deus freuzet ur sell eorizhekaet war ar bennoberenn. Goulenn ar revelezh ha roll ar vaouez en Island krennamzerel o deus kemeret ul lec'h a bouez er preder hollek diwar-benn al lennegezh krennamzerel en Island dre vras ha diwar-benn *Njåls saga* pergen. *Gender studies*, istor ar revelezh, bredelfennerezh, benevelouriezh : an holl vennozioù ha damkaniezhoù nevez-se degaset dimp gant an XX<sup>vet</sup> kantved. Hogen daoust d'ar goulennoù nevez ha deurus degaset gant hevelep mennozioù, tuet int da vont hebiou da c'houlennoù all, na pegen grennus e vent, pe zoken muioc'h.

Degasomp da goun evelkent pezh eo endalc'hed *Njåls saga* : o vezañ ma 'z eo ar saga hirañ deuet betek ennomp eus krennamzer kornog Skandinavia (mui pe vui 300 pajenn en un embannadur kempred), ma kaver ouzhpenn ur 400 bennak a dudenoù o tremen ennañ ha ma 'z eo lies an istorioù dezrevellet gantañ, pezh nad eo ket ezreol en ur saga, ez eo kemplezhik an kez endalc'hed. Evit ober berr e c'hoarvez an istor tro dro d'an takad annezet gant familh Njáll (e mervent an enezenn), ur merour galloudus er rannvro ha fur, hag a-hed e vuhez, betek e varv hag un tamm war-lerc'h. Da istorioù boas ar sagaoù (dizemglevioù diwar-benn takadoù douar pe dimezioù, dialoù, emgannoù ha tunioù da baouez al lzhadegoù), e kaver ur geneilded divoutin o vont pelloc'h eget ar geneilded politikel (en henislandeg<sup>1</sup> *vinfengi*) etre Njáll hag ur merour galloudus all anvet Gunnarr. War ar c'hraf-se eo ez eus kroget da bledñ gant mennozioù diwar-benn revelezh an div dudenn hag an darempredoù o vont etrezo hag o gwraez.

Kreizel eo enta, neket hepken sevel ar goulennoù mat, hogen o sevel en un doare kempoell ha louere. Er pennad-mañ e klaskimp sklaeraat an traoù diwar-benn an doare ma c'haller kompren an darempred etre goured ha maouezed en Island krennamzerel evel ma 'z int diskouezet e *Njåls saga*. A-benn e ober e welimp da gentañ goulenn ar bengaz, da heul an darempred etre gour ha maouez, pezh hon c'haso d'an darempred kenetre goured.

### Bengaz e *Njåls saga*

Hag un oberenn vengazer eo *Njåls saga* ? Kantreizh eo moarvat sevel ar goulennoù-mañ, d'an nebeutañ diouzh ur savboent benevelour. En e bennad e veneg Ármann Jakobsson ur pennad gant Helga Kress o tiskouez ar saga evel « mirelour ha bengazer,

1 A-zivout henislandeg, hennorrek, norrek, sl. ar pennad diaraok.

o tiskouez un oadvezh a zigevalder. Ar c'hourevezh oa an eorizh anezhi hag ar maouezed diaoulekaet<sup>2</sup>.

Prederiomp diwar-benn pezh a dalvez « bengazer » (*mysoginist*). Ar ger brezhonek, bet savet nepell 'zo<sup>3</sup>, a dro mat an termen, o tont eus an henc'hresianeg *μισογυνής*, *misogynēs*, kenaozet diwar *μισος*, *misos* (« kaz, kasoni ») ha *γυνή*, *gunē* (« maouez »). « Kazer maouezed » a dalvez enta ar ger. Ur ster a hañval bezañ sklaer met a ziskouez bezañ kemplezh ; rak petra a dalvez « kaz » ? Hag ouzh ar feulster ouzh ar maouezed e sell ? Pe hepken dispriiz sioul ha kealiadurek ? Siwazh eo leun ar frazenn emaoimp o paouez lenn gant ar pezh a vije bet anvet goubaradoù gant Hegel : « mirelour », « bengazer », « digevatalder ». Anat ez eus ur ster dibarek ha reus gant hevelep termenou. Sebezus eo gwelout n'eus hini ebet anezho o klotañ gant hedouriezh ar Grennamzer ; kentoc'h e hañvalont daveañ sklaeroc'h da stourmoù hag arc'hadurioù kealiadurek eil lodenn an XX<sup>vet</sup> kantved<sup>4</sup>.

Hon pal amañ n'eo ket hollekaat an holl zomanoù imboure'h hon eus meneget gant ur frazenn hepken. Kement se a ziskouez neoazh ez eo daou-droc'h ur goulenn : kuzhat a ra kement hag e tiskouez. Diskouez a ra ar mare m'emañ o komz ha kuzhat an hini a venn komz diwar e benn. Friedrich Nietzsche a lavar e *Die Fröliche Wissenschaft* (« Ar ouiziegezh lirzhin ») pezh a hañval bezañ an ali gwellañ da reiñ d'un imboure'her : « Bev dianaoudek eus pezh a hañval bezañ ar pouezusañ da 'z oadvezh ! Laka etrezout ha hiziv da nebeutañ kroc'hen tri c'hantved ! »<sup>5</sup>. Kudennusoc'h zoken eo an tri zermen hon eus kemeret dre ma 'z int tuet da zespizañ en un doare nac'hel ar bed dec'heriet gant ar saga ; ouzhpenn se en despiz diouzh savboent talvoudoù a sell, evel nep talvoud all, ouzh ar menoiou, na pegen reizh ha gwir e hañvalfent bezañ d'hon c'hempredidi.

Kudennus e van ar saga avat, tudenn Hallgerð<sup>6</sup> pergen, daoust m'eo pell a vezañ divoutin : pa sellfer Helené a Droja, ar rouanez Gwenivar pe Izold, hep zoken

<sup>2</sup> « [...] conservative and misogynist, reflecting an age of inequality. Masculinity was its ideal and women were vilified », meneget e Ármann Jakobsson, « Masculinity and Politics in *Njåls saga* », in *Viator*, Levrenn 38, Niverenn 1, 2008, p. 194 [brezhoneg ganin].

<sup>3</sup> St. Guy Étienne, *Geriadur ar Vezekniezh*, rann 9 da vezañ embannet gant Preder a-benn nebeut, mellad « misogynie ».

<sup>4</sup> Spesadel da luskadoù kleizelour, benevelour pe liammet ouzh gwirioù mab den en eil lodenn an XX<sup>vet</sup> kantved eo ar c'hudennadurioù a-zivout mirelouriezh, bengaz pe digevatalder. Ne glotont tamm ebet enta gant ur preder sirius diwar-benn ar Grennamzer a oa an aozadur politikel anezhi graet gant goured dre vras, gant ur gealiadurezh enep ar c'hemm hag un digevatalder strizh etre an hangorfuniadoù.

<sup>5</sup> « Lebe unwissend über Das, was deinem Zeitalter das Wichtigste dünkt! Lege zwischen dich und heute wenigstens die Haut von drei Jahrhunderten! », in Friedrich Nietzsche, *Die fröhliche Wissenschaft*, 1882, § 338 [brezhoneg ganin].

<sup>6</sup> Al lizherenn « ð » a zistager evel an « th » er saozneg *this*.

menegiñ Eva er *Bibl*, e weler eo bezant mat ar vaouez evel saverez kudennoù grevus. Sirius mat eo degouezh Hallgerðr avat, o vezañ ma 'z eo an abeg da varv tri mevel<sup>7</sup>, he daou waz kentañ<sup>8</sup> hag he zrede Gunnar, rak ma nac'h e skoazellañ d'ar mare m'eo taget<sup>9</sup>.

Gallus e ve enta sellout ar saga evel bengazer daoust ma rankfed sevel nemedoù e-tal da hevelep evezhiadenn : ur saverez kudennoù eo Hallgerðr hogen n'eo ket muioc'h eget m'eo Mjorðr pe ur bern tudennoù gour er saga-mañ kement hag e re all. Ouzhpenn se e kas an doare selledoù-se an hevelep gwallwered hon eus meneget abretoc'h : despizañ ent nac'hel a ra personelezh Hallgerðr ha mont hebiou d'ar pezh a zo yael rik ganti. Ur gudenn a boelloniezh rik a gaver aze : n'eo ket o lavarout pezh n'eo ket an dra-mañ tra (*ket kevatal*, *ket gwelet* mat gant ar c'houred, h. a.) e respizer an kez tra. Ardaoladoù yael a ranker kavout da lavarout *piv* eo Hallgerðr, *petra* eo an anv anezhi.

Pell a-walc'h diouzh hon divoud e c'hallfe al lodenn gentañ-mañ hañvalout bezañ ; kudennoù hentenn a ziskouez avat ha tro a ro dimp da vont pelloc'h o tiwall da gampoellded ar c'hudennoù kizidik kenan. Bremañ e c'hellomp adsevel hon goulenn kentañ ur wech ouzhpenn, en un doare louerelec'h ha deznaouet avat, oc'h emgreizañ war roll Hallgerðr ha, gant ur sav gwell ledanoc'h, meizadur ar vaouez evel m'eo diskouezet e *Njåls saga*.

### Roll Hallgerðr

Ha liammet eo tudenn ar vaouez gant ur roll fall da vat – lakaomp ur « roll enebour » evel ma lavarje A. G. Greimas – e *Njåls saga* ? Hag ur flemmskrid a-enep ar maouezed eo ar saga, Hallgerðr ouzh o dec'houezañ ?

Kounaomp pezh a c'hoarvez er saga : Hallgerðr zo anezhi merc'h Hqskuldr a hañval bezañ un den galloudus mat : roet eo e hilrenk<sup>10</sup>, aozet ur banvez gantañ... anat eo enta e rank hi bezañ dimezet. Hogen evel ma teu hag ez a ar wazed, lazhet en arbenn dezhi, e teu Gunnar a Hliðarendi da vezañ an trede da zimeziñ ganti. Ken abred ha deroù an istor eo deskrivet merc'h Hqskuldr evel un dudenn hoalus met gourdrouzus : « *Brav mat eo gweled ar plac'hig ha meur a zroug a zegaso dit. Met ne ouzon ket penaos eo erruet an daoulagad laer-mañ en hon familh* », a respont breur

<sup>7</sup> *Njåls saga*, XXXVI, XXXVIII, XLII.

<sup>8</sup> *Op. cit.*, XI, XVII.

<sup>9</sup> *Op. cit.*, LXXXVII.

<sup>10</sup> Un doare eo an hil da gantreizhañ galloud unan bennak. (Sl. ar c'hontrol e *Sverris saga*, XCVI :

« *vápn þeira eru ekki atfróð* », « o ardameziou n'o doa ket a hilrenk » [brezhoneg ganin].)

Höskuldr pa c'houlenn hemañ outañ na pegen kenedus eo e verc'h<sup>11</sup>. Hogen an « daoulagad laer »-se (*þjófsaugu*) ne vironet ket outi a vezañ c'hoantaet gant meur a zen. Setu un doareenn a adkaver gant tudennoù ken benel ken gourel : evel Egill, Grettir pe Snorri godi<sup>12</sup>, Hallgerðr n'eo un den mat na mat na fall da vat<sup>13</sup>. Hogen e kontrol an tudennoù saga meur-se ha resisoc'h ar re a gaver e *Njåls saga*, e hañval Hallgerðr bezañ un dudenn kentoc'h rust : ur vammenn gudennoù eo da vat evit an holl, he gwazed, Gunnar pergen, Njåll hag e familh, he familh dezhi he unan erfin, meur a gar dezhi o vervel en abeg dezhi.

Ha prouiñ a ra se eo nac'hel skeudenn ar vaouez ? Yañi re vuan e c'hallfe hon lakaat da vankout ar skod. Pa grog gwreg Njåll, Bergþóra Skarpédinsdóttir, da vont e kenniñv gant Hallgerðr, ez emzalc'h dres evelti ; ne c'hell ket avat bezañ sellet evel ur wreg ken fall ha Hallgerðr, er c'hontrol<sup>14</sup>. Neuze e ranker arseliñ roll ar vaouez evel m'eo diskouezet e kenstourm an div itron c'halloudus. Diouzh reizh e vez diskouezet gant ar sagaoù darempredoù galloud etre goured ha neuze an talvoudoù a ra brientinded ur gour ; hini Njåll avat a ziskouez dimp ouzhpenn ur blegenn disheñvel kenan a zo an darempredoù galloud etre maouezed, gant talvoudoù disheñvel enta, dibarek d'ar maouezed<sup>15</sup>.

En e levr *Viking Age Iceland* e tispleg Jesse Byock ne c'halle ket ar maouezed kemer perzh er bed politikel ha lakaet oant e-maez ar vendettaoù, lazhadegoù ha dialoù<sup>16</sup>. Meizañ a c'hellomp amañ e oa deuriet ar maouezed, en hevelep doare hag ar c'houred, gant o enor ha hini o familh. An diforc'h pennañ eo an hini anvet gant Hannah Arendt en *The Human Condition*, diforc'h « rouantelezh ar foran ha hini ar prevez »<sup>17</sup> (*the public and the private realm*). Er sagaoù, evel en Henroma, e vez rannet gant an denion ur bed rannet etre an div rouantelezh, div rouantelezh a voe kollet hervez Arendt gant an arnevezelezh pa zeuas war wel pezh a anvomp *kevedigezh (society)*<sup>18</sup>. Hervezi n'eus ket a gevredigezh a-raok an arnevezelezh : nemet an div

11 « *Érit fögur er mæri sjá, ok munu margir þess gjalda; en hitt veit ek eigi, hvaðan þjófsaugu eru komin í ættir várar* », *Njåls saga*, I [brezhoneg ganin].

12 Istor an tri haroz-mañ a c'haller kavout e bep a saga, *Egils saga*, *Grettis saga* hag *Eyrbyggja saga*.

13 Torfi Tulinius a gomz eus ur « mar ontologel » (*ontological uncertainty*) en e bennad « Saga as a myth: the family sagas and social reality in 13th-century Iceland », in Barnes and Clunies Ross (emb.), *Proceedings of the 11th International Saga Conference*, 2-7 Mezheven 2000, Sydney, University of Sydney, Centre for Medieval Studies, 2000, p. 529 ha da heul.

14 Ken feal eo Bergþóra e tivizo mervel gant he gwaz p'he deve gallet tec'hout eus gwalldan o zi.

15 Ne ziorroimp ket re ar c'hraf-se ; skouerius e c'hell bezañ skouer atahinerezh ar wazed gant o gwraez evit bezañ kaset d'an emgann. Se a adkaver e meur a saga, evel *Eyrbyggja saga*.

16 Jesse Byock, *Viking Age Iceland*, Penguin Books, 2001, « Women and Choices of Violence and Compromise » : p. 196 ha da heul.

17 Hannah Arendt, *The Human Condition*, The University of Chicago Press, Chicago, 1958.

18 *Op. cit.*, p. 38.

rouantelezh-se, ar foran hag ar prevez. E meizerezh Island ar Grennamzer e hañval bezañ devoudus an naouuster-se, dreist holl evit a sell ouzh hon divoud bremañ ez eo danzeadur rolloù ar reizhoù<sup>19</sup>.

Evel reizh ez eo goured ha maouezed a rann ar bed-se etre an div rouantelezh, foran evit an eil, prevez evit egile. Hogen daoust d'he lec'h e rouantelezh ar prevez e c'hell ar vaouez levezonañ, delanvadiñ ha zoken skogañ an tachad foran. Skouerioù a gaver e meur a saga evel hini Geirriðr en *Eyrbyggja saga*, a gas he mibion da emgannañ (skouerioù a-leizh a gaver eus hevelep gwraez o kas ar wazed d'an emgann). O stourm e vez atav ar gour islandat avat : gant e getpared en tachad foran, gant e wreg hag e vugale en e gêr. Heñvel e chom ar skod avat : difenn enor an hinienn ha hini ar familh kement hag o ferc'henniezha na vezer netra hepti en Island, kement er Grennamzer ha hiziv.

Gwelout a reer e c'hell Hallgerðr kaout ur roll kalz luzietoc'h eget hini ar saverez a gudennoù. Difenn he lazioù ha hini he familh a hañval ober daoust na emvata ket avat he disentezioù d'he c'herent. N'eo ket enta un dudenn fall met he ezhommoù a zo dislavarus evel re an dud all zo unan eus abegoù an tragedi e *Njåls saga*. Evel Antigone e-tal da Kreon, pep hini a rank derc'hel gant e roll. Marteze ar skod n'eo ket arzaelañ lec'h an eil pe egile hogen diskouez kentoc'h diaesterioù ar c'heviun etre an denion.

#### Karantez ha keneilded

Ar gouleñn a c'hellomp sevel bremañ enta eo an abeg ned a morse Hallgerðr da vezañ kastizet (da lavarout eo, a-fet pezh a vez gortozet gant ul lenner romantoù evel ma 'z eo lenner europat-kornogour an XXI<sup>vet</sup> dre vras, perak ne vez ket pinijet gant istor ar saga). Hannah Arendt a gomz eus rouantelezh ar prevez evel lec'h ar voniekañ digevatalded. Soñjal a c'hallfemp e tiranterezh ar gour ; amañ n'eo ket gwir avat.

Despizadur Arendt a glot mat gant pezh a gaver er sagaoù : « Diforc'h et o ar *polis* [henc'hresianeg evit « keoded »] diouzh an tiegezh rak na anavezet nemet «ketpared» (*equals*), endra oa an tiegezh kreiz an digevatalder strishañ (*the strictest inequality*) »<sup>20</sup>. Hogen kentoc'h eget un arver sonn eus pezh a c'hallfe degas un deztannadenn evel honnezh e ranker gwelout an daou dachad evel hedreuz mat. Ha m'he deus ar vaouez d'ober ouzh ar boud uheloc'h ez eo ar gour, ne derc'h ket o stourm outañ ha d'e lakaat d'ober pezh a fell dezhi. Gwelout a reer enta ez eo ar vuhez prevez da nebeutañ ken kenempret hag an hini foran. E dalc'h an eil emañ egile, en ur c'hempouez rizhek

19 A-zivout kement-se, sl. labourioù Kirsten Hastrup ha Joonas Ahola peurgetket (trugarez da Marion Poilvez evit an daveoù-se).

20 *Op. cit.*, 32.

da Island. Hag e c'hallfemp komz a « garantez » en hevelep doare ha ma komzer a « geneilded » (*vinfengi*) e reizhiad politikel Island<sup>21</sup>. Un anv zo gant se ouzhpenn se : an diegezh.

E se ez eo ken pouezus ar « garantez » hag ar « geneilded », ma n'eo ket muioc'h ; troet e henislandeg e lavarimp eo ken pouezus an diegezh hag ar *vinfengi*, ma n'eo ket muioc'h. Ar gour islandat en devez da bleidiñ gant an dimez hag ar c'hevredadurioù, gant e enor hag e berc'henniezh bepred en e spered. An dislavaroù a zo disoc'h an tennerioù etre ar foran hag ar prevez a ganderc'h plegennoù diziskoulm, pezh a zo unan eus naousterioù pennañ tragegezh ar sagaoù. Ouzhpenn se ez arc'hwel an darempredoù « garantez » evel re ar « geneilded », gant reolennoù strizh. Unan eus ar bonreolennoù-se eo ne c'hell ket ur vaouez bezañ gloazet pe kemer perzh e rouantelezh ar foran<sup>22</sup> ; unan all zo e ray ar « geneiled » o seizh gwellañ da zerc'hel darempredoù mat daoust d'an holl skoilhoù a ve o sevel.

Ar geneilded etre Njáll ha Gunnar koulskoude a hañval mont en tu all da zespizadur klasel ar *vinfengi*. Ken pouezus eo nerzh o darempred, zoken pa vez o vont a-enep d'o lazioù hiniennel ha familhel, ken ma 'z eo bet arbennigourion 'zo o prederiañ diwar-benn ster o c'heneilded, ouzh he gwelout a-wechoù evel heñvelreviezh<sup>23</sup>. Sklaer eo avat ne c'hoarvez darempred revel ebet etre an div dudenn ha hevelep desteriadur, hep bezañ diwir penn da benn, n'eo ket gwir da vat. Sklaer eo evelkent eo kreñvoc'h o c'heneilded eget ur c'hevredadur politikel hepken. Dodenn ur geneilded etre goured a zo ken kreñv e tenn da garantez a gaver c'hoazh hag adarre a-dreuz ar sevenadur european. Akhilleus ha Patroklos, Montaigne ha La Boétie, Nietzsche ha Wagner : an darempredoù gourel tre-se ned int ket hep liamm ouzh hini Njáll ha Gunnar. Hag e devoud, div dudenn o klask da zerc'hel gant o c'heneilded pa vez pep tra o herzel dezho zo marteze an tostañ d'ar pezh a anve Nietzsche *Sternen-Freundschaft* pe « keneilded sterel »<sup>24</sup>. Amañ ne c'hoarvez ket ar geneilded en oabl hogen war an douar hag e klask menel en desped d'an holl ziaesterioù ha dizarbennoù. Un dra pouezusoc'h eget an darempredoù a c'halloud a hañval bezañ o c'hoarvezout amañ. Al liamm kevrinus-se a hañval bezañ nebeutoc'h liammet ouzh ar rev eget ouzh ul liamm kreñv hogen empleg. An un tennder a zeu war wel c'hoazh etre an ezhomm ober e-touez ar c'hedved hag un ezhomm kevrinus, pouezusoc'h hogen diunvanadus gant ar vuhez.

21 Byock, *op. cit.*, XX « Systems of Power : Advocates, Friendship, and Family Networks », p. 185-206.

22 Ur skouer resis a c'haller kavout e *Gísla saga*, pa 'z a e wreg Auðr da skeiñ gant unan eus enebourion he gwaz ha na c'hell ket hemañ skeiñ ganti en abeg d'an dizenoruz e ve.

23 Ármann a harz ouzh hevelep fazi lenn en e bennad, oc'h ober kentoc'h gant an termen « heñvelkevret » (*homosocial*).

24 « Sternen-freundschaft », § 279 eus *Die Fröhliche Wissenschaft*.

*Klozadur : muioc'h eget ar vuhez*

Buhez an dud veur a ziskouez n'eo ket kembesuz ar mennadoù uhelañ gant ar vuhez : prederourion evel Sokrates pe Spinoza, arzourion evel Mozart pe Proust, harozed evel Antigone pe Gunnar o deus prouet en un doare pleustrek e oa un dra bennak c'hoantadusoc'h – hag an « dra bennak »-se a eneb ouzh ar vuhez. An dle, ar garantez, ar geneilded, ar wirionez, an oberenn arz : kement a abegoù da chom hep sentiñ da urzh ar bed hag an destrizhoù kevredadel. Ar geneilded meizet evel henn a c'hallfe hañvalout bezañ gwall c'houbarel ha damkanel ; pezh a c'hoarvez neoazh pa rank Gunnar kuitaat Island a-benn kavout ul lec'h asur e Norge a ya en tu all da nep gwerc'hadelezh. Gweled ar menezioù a zo e di warno e unan en laka da chom, ha neuze da choaz ar marv.

Pa 'z eo mat tre klask hepkoriñ ar muiañ a c'haller traletodiñ ha lenn en un doare ambreek, arabat disoñjal e vez heuliadoù d'ar santad-mañ hon eus deskrivet en istor danevellet e *Njáls saga*. An darempred bet deskrivet betek bremañ a hañval dimp lourel mat enta hag o terc'hennañ ur werc'helezh eus buhez mab den : ouzhpenn d'an darempredoù politikel ha prevez hag an ezhommoù pemdeziek ez eus un dra ouzh hon gervel, ur galv na c'hellomp ket atav herzel outañ, hogen a laka hon buhez dellezek a vezañ buhez.

## Harrison Bergeron

Ar bloavezh 2081 e oa hag an holl dud a oa kevatal erziwezh. Ne oant ket kevatal hepken dirak Doue hag al lezenn. Kevatal e oant e kement doare a vez. Nikun ne oa finoc'h eget nep piv bennak. Nikun ne oa kreñvoc'h pe fonnusoc'h eget nep piv bennak. Ar c'hevatalder-se a zeue eus an Enkemmadoù 211, 212 ha 213 eus ar Vonreizh hag eus evezh diziwezh gwazourion Penn Nammer ar Stadoù Unanet.

Traoù 'zo ne oant ket gwall reizh a-fet bevañ avat. Da skouer, miz Ebrel a lakae tud 'zo da bennfolliñ c'hoazh pa na oa ket eus an nevezamzer. Er miz beac'h-mañ e tennas gwazed ar PN ar mab a bevarzek vloaz da George ha Hazel Bergeron, Harrison e anv, kuit.

Tragek e oa, ya, hogen George ha Hazel ne c'hallent ket soñjal kalz e se. Hazel he doa ur spered krenn da vat, pezh a dalveze dezhi na soñjal e tra ebet nemet e-pad pennadoù berr. Ha George a oa e spered kalz a-us d'an hini reel en doa un dilañs skingomz e-barzh e skouarn. Reketet e oa gant al lezenn e wiskañ bepred. Keidet e oa ouzh un treuzkaser eus ar gouarnamant. Bep ugent eilenn pe dost, an treuzkaser a skine un trouz lemm a-benn herzel ouzh tud evel George a dennañ ur splot direizh eus o empenñ.

George ha Hazel a selle ouzh ar skinwelerez. Daerou a oa war divjod Hazel hogen d'an ampoent, ankouaet he doa petra oa kaoz eus kement-se.

Ouzh skramm ar skinwelerez e oa barrezherezed.

Seniñ a reas ur c'hloc'hig e-barzh penn George. E soñjoù a nijas kuit, peget ar spont enno, evel forbidden gant un arhent diwall.

"Ur brav a zañs e oa an dañs emaint o paouez ober," a lavaras Hazel.

"Heum?" eme George.

"An dañs-se – brav e oa," eme Hazel.

"Ya," eme George. Klask a reas soñjal un tammig er barrezherezed.

Evit gwir, ne oant ket kenkoulz se – na gwelloc'h eget piv bennak a vije, forzh penaos. Sammet e oant gant gourizoù ha sac'hoù plomet, ha masklet e oa o dremm evit ma n'emsantje den ebet evel pa vije liv ar skuizh warnañ, o welout ul lusk dieub ha drant pe un dremm goant. George a c'hoarie gant ar c'heal dispis e c'hallje ar gollerion na vout nammet. Hogen ned eas ket pell ganti a-raok ma voe un drouz arall o strewañ e soñjoù kuit en e skingomz skouarn.

George a drivlias. Evel div diwar an eizh barrezherez.

Hazel en gwelas o trivliañ. O vout ma n'he doa ket namm bredel ebet he unan, e c'houlennas ouzh George petra oa an trouz nevesañ.

"Trouzal a rae evel ur voutailhad laezh skoet gant ur morzhol," eme George.

"Me 'soñj din e vefe deurus ken-ken selauz ouzh an holl drouzioù disheñvel," eme Hazel, un tammig c'hoantek. "An holl draoù o deus soñjet enno."

"Heum," eme George.

"Nemet, mar bijen ar Penn Nammer, te 'oar petra 'rafen me?" eme Hazel. Hazel, e gwirionez, a denne kalz eus ar Penn Nammer, ur vaouez, Diana Moon Glampers he anv. "Mar bijen Diana Moon Glampers," eme Hazel, "e lakajen kleier da Sul – kleier nemetken. Un doare da enoriñ ar relijion."

"Gallout a c'hallfen emsoñjal ma ne vije ken 'met kleier," eme George.

"Neuze – lakaat 'nezho da vout trouzus da vat," eme Hazel. "Me 'soñj din e vefen ur Penn Nammer a-feson."

"Kenkoulz ha ne vern piv," eme George.

"Piv 'oar gwel 'gedon petra eo bout normal?" eme Hazel.

"Mat," eme George. Kregiñ a reas da soñjal a-strinkelikadennoù en e vab a oa en toull bac'h bremañ, e Harrison, met kevarc'h ur fuzuilh unan warn ugent a harzas kement-se en e benn.

"Va doue!" eme Hazel, "Se oa estlammus, ket?"

Ken estlammus ma oa morlivet George hag o krenañ, ha daerou a save war vord e zaoulagad ruz. Div diwar an eizh barrezherez a oa semplet war leur ar studio a starde o daouvidig.

"A-greiz holl e seblantez bezañ ken skuizh," eme Hazel. "Perak ne astennez ket war ar sofa evit repoziñ da sac'h namm war ar penn gwele, va c'haredig." Dave a rae d'ar pergont seizh luriad plom a oa er sac'h lien a oa kadranaset tro dro da c'houzougenn George. "Kae ha renoz ar sac'h ur prantadig," emezi. "Ne ran forzh ma n'out ket kevatal din ur prantadig."

George a bouezas ar sac'h gant e zaouarn. "N'on ket chalet gant se", emezañ. "N'en merzhan ket ken. Se zo ul lodenn ac'hanon nemetken."

"Te ken skuizh d'ar mare-mañ – divi, zoken", eme Hazel. "Mar be hepken un doare d'ober un toullig e penn ar sac'h ha tennañ kuit un nebeud eus o bolotennou-goù plom nemetken. Un nebeud nemetken."

“Daou vloavezh toull bac’h ha daou vil dollar da vat evit pep bolotennig tennet kuit,” eme George. “Ne ran me ket ur jeu mat eus ar jeu-se.”

“Mar gallfes derc’hel un nebeud anezho er-maez pa vez o tistreiñ du-mañ eus da labour,” eme Hazel. “Pezh ’zo – ne c’hoariez gant den tro dro. Chom a rez dre amañ hepken.”

“Mar klaskfen chom digastiz ganti,” eme George, “neuze, tud arall a chomfe digastiz ganti – ha nebeut goude e vefemp deuet war hon c’hiz en amzerioù du adarre, gant an holl dud o c’hoari a-enep an holl dud adarre. Se ne vourrfes ket, n’eo ket gwir?”

“E gasaat a rafen,” eme Hazel.

“Setu,” eme George. “Kentizh ha ma krogo an dud da druchañ ganti al lezennoù, ha petra soñj dit a c’hoarvezo gant ar gevredigezh?”

Mar bije chomet Hazel hep gallout reiñ ur respont d’ar goulenn-mañ, n’eo ket George en dije savet unan. Ur c’hwitellerezh a zeuas en e benn.

“Da ’m soñj e kouezhfe pep tra en e boull,” eme Hazel.

“Petra ’rafe?” eme George.

“Ar gevredigezh,” eme Hazel hep gouzout re. “N’eo ket se emaut o paouez lavarout din?”

“Piv ’oar?” eme George.

A-greiz holl e oa chomet programm ar skinwel a-sav evit ur c’hannadig keleier. Ne oa ket sklaer a-zivout petra oa ar c’heleier da gentañ pa oa ar c’hinniger, evel an holl ginnigerion, dalc’het en e zistagadur da vat. E-pad hogozik un hanter vinutenn, ha birvilh ennañ, ar c’hinniger en doa klasket lavarout, “Itronezed hag Aotrounez –”

Leuskel a reas da vont a-benn an diwezh ha reiñ ar c’hannadig d’ur varrezherez a-benn m’en lennfe.

“Se zo normal –” a lavaras Hazel diwar-benn ar c’hinniger, “klasket en deus. Se eo ar pep pouezusañ. Klasket en deus ober gwellañ ma c’halle gant ar perzhioù en deus fiziet Doue ennañ. Sur en do ur c’hresk gopr evit bout klasket ken start-se.”

“Itronezed hag Aotrounez –” eme ar varrezherez, o lenn ar c’hannadig. Sur a-walc’h e oa bet kaer meurbet peogwir e oa hakr ar maskl a zouge. Ha ken aes ha tra e oa gwelout e oa an hini greñvañ hag an hini heneusañ eus an holl gorollerezed peogwir e oa he sac’hoù namm ken tev hag ar re a vez douget gant ar wazed a zaou c’hant lur.

Hag emzigareziñ a reas poent ’zo evit he mouezh a oa unan direizh kenan evit arver ur vaouez. He mouezh a oa unan domm, unan sklaer, ur gerzhenn anamzerel.

“Digarezit me –” emezi, hag e krogas adarre en ur ober d’he mouezh bout nann kevezus.

“Harrison Bergeron, oad pevarzek,” emezi dre ur ragach maenat, “zo o paouez terc’hel eus an toull bac’h, e-men hor boa diskred warnañ bout iriennet a-benn distroadañ ar gouarnamant. Bout ez eo un ijin a zen hag un atletour, isnammet eo, hag e rank bout sellet evel un den dañjerus.”

Kurt Vonnegut Jr.

Troidigezh gant Fabrig Coupechoux diwar ar saozneg,

© 1961 gant Kurt Vonnegut Jr. Embannet da gentañ e *Fantasy & Science Fiction*.

## Prederouriezh

### Un eskemm lizhiri

#### E sigur hon pennad « Sevel ha Holc'hiñ »

D'an 30 Here 2014 e tegemeremp ur valad digant ul lenner eus *Nidiad*. Hañvallet en deus eñ pouezañ war grafoù a gavomp pouezus ha soñjet hon eus e ve mat embann danvez ar respont graet dezhañ evit resisaat un nebeud traoù.

Setu enta e lizher :

[...] *Emaon o paouez lenn pennad Gwendal Piégais « Sevel hag Holc'hiñ » e-barzh Nidiad niv. 16, Here 2013, ha chomet on bourt war un nebeut gerioù ha nem eus kavet e geriadur ebet, geriadurioù ar yezh arnevez evel-just [...] Setu ar gerioù-se :*

- Holc'hiñ, holc'h, holc'het

[...]

- Kevanolc'h

[...]

Ha setu respont aozer ar pennad, Gwendal Piégais :

Bremañ, kudenn *holc'h* ha *kevanolc'h*.

Da gentañ penn e rankomp lavarout deoc'h eo ganet ar brederiadenn-mañ e-doug va studioù war an istor hag ar brederouriezh. Evit bezañ resisoc'h, o ren enklaskoù hag imbours'hioù war-du orin an universitedoù ma vez c'hoazh studiet gant kalz tud hiziv<sup>1</sup>. Ha bremañ, bezomp resisoc'h c'hoazh : skoet eo bet va sell ha va spered gant istor an darempredoù etre an universitedoù hag ar stadoù a ziorro e Europa e-doug ar Grennamzer. War ar c'hraf-mañ evel war gement a grafoù all, Breizh a chome un nemedenn.

Petra oa amkan an universitedoù krennamzerel-se ? Stummañ tud e domani ar gwir, ar vezekniezh hag an doueoniezh<sup>2</sup>. Dre ar stummadurioù-se ez eus bet barrekaet ur brasniver a dud a roas ul lañs nevez d'ar vuhez sevenadurel en Europa. Met

<sup>1</sup> Nac'h a reomp arverañ ar ger *skol veur*, brizhtroidigezh ankevasas eus ar ger *université*. Sl.

<sup>2</sup> « Sevel ha holc'hiñ », in *Nidiad*, niverenn 16, Here 2013.

<sup>3</sup> *Art. cit.*, p. 24-25.

en deroù hag e kalon ar stummadurioù-se e kaved un dafar boutin. P'en devezed c'hoant studiañ ar gwir, ar vezekniezh pe an doueoniezh, e ranked tremen dre un nebeud bloavezhioù o studiañ an arzoù (*artes liberales*), ar re-se o vezañ gramadeg, retorik, daelerezh, sonerezh, steredoniezh, mentoniezh, jedoniezh. Sed aze kalon ouiziadoniel Europa ar stadoù.

Ha Breizh e kreiz an dra-mañ ? E-pad pell e vevas Breizh pell diouzh al lusk sevenadurel-se. Se ne dalvez ket ne voe ket stummet eno. Da skouer, e kanselerezh an Duged e kaved tud tremenet dre universited Paris pe Orléans. Per lañ Breizh a renas gant Alix Iañ oa bet stummet en universited ivez. Padal ne gaved ket a universited evel e Leuven, Köln pe Bolonia e Breizh. Perak ?

E gwirionez, Breizh oa bet ezel e-pad un nebeut dekvloaziadoù, ma n'eo ket kantvedoù, eus ur rouedad sevenadurel birvidik ha skedus kenan en Europa : ar vanac'hegezh iwerzhonat. An hollad sevenadurel-se en deus bet ul levezon bouezus tre en Arvorig, war Enez Preden, war ribloù mor Breizh betek mor an Norzh. Abatioù zo bet savet ; tro dro dezho, kêriadenoù a veve, a genwerzhe. En abatioù-se e veze kenwerzhet, pedet, prederiet ha krouet. E Breizh ez anavezomp mat abati Sant Gwenole e Landevenneg, hini Iona e Bro Skos, hini Cluain Mhic Nóis, hag er mare-mañ emañ o vevañ e Brussel, e kumun Sint-Joost-ten-Node, bet savet gant ur manac'h iwerzhonat. Met ar rouedad-se, ken birvidik ma oa, zo bet diskaret gant an aloubadegoù norman. Ar reizhiadoù politikel europat o vezañ gladdalc'hel d'ar mare-mañ, a rankas kemmañ a-benn enebañ outo. Ar c'hemm-se a voe buhezhet e Breizh ivez, padal e tremenas eus ur renk a bouez en ur rouedad virvidik d'ur renk suj en ur rouedad all : hini ar bed latin roman, arouezet gant universitedoù Bolonia, Paris, h. a. An duged a glaskas kemer an hevelep pleg ha rouaned Bro C'hall o sevel ur stad soliet war sternioù pe stummet en universitedoù. An dug Frañsez II da skouer a glaskas staliañ un universited e Naoned, en aner avat...

Hag ar c'hevanolc'h ? Hag an holc'hiñ e kreiz an dra-se ? Krogomp da gomz da gentañ penn, goude bezañ komzet eus an tremened, eus ar bremañ. Anat deoc'h ez omp bodet en dro d'ar gelaouenn-mañ, *Nidiad*, a-benn studiañ, prederiañ, imbours'hiezh e brezhoneg, a-zivout piv omp ni evel kumuniezh denel ha sevenadurel. Anat deoc'h n'eus ket bet roet dimp ar binvioù evit e ober gant an Istor. Anat deoc'h e labourimp d'o sevel. Neuze : petra ober ? Adparomp hon sell war ar pezh pleustrek a fell dimp sevel : ul lec'h evit ar ouiziegezh o vezañ un darempred resis ouzh ar ouiziegezh. Va c'helenner prederouriezh a r Grennamzer a lavare dimp alies : « *l'université ce n'est pas un lieu, c'est une certaine configuration du savoir* ». Un darempred ouzh ar ouiziegezh evel se a glaskomp adkavout en hon oberenn. Neuze, perak ket adkemer an anv *université* ha sevel unan war parkeier kreiz Breizh ? Ne adkemerimp ket an anv-se peogwir e chomfemp bouzar ha dall dirak hon istor, dirak an devoud n'eus ket bet a universited e Breizh evel ma 'z eus bet e Bro C'hall, evel ma 'z eus

## Un eskemm lizhiri

bet evit istor Bro C'hall. Adkemer an termen *universited*, lavarout « universited », a dalvez kement ha menel hep gwelout an diouer en hon istor.

Padal e klaskomp daveñ d'ul lusk sevenadurel ha politikel a voe hini an universitedoù european. Setu ar glaoustre : envel pezh a reomp, daveñ d'un tremened hep disoñjal perzh hon planedenn. Setu perak hon eus savet ar ger *kevanolc'h* e-pad eskemmoù gant Guy Étienne, *kevanolc'h* o c'hoarvezout eus *kevan-* ha *holc'h-*. Ar rakger a gaver en un termen hon eus amprestet d'ar c'hembraeg, « kevandir » ; talvezout a ra an hollad en ur ster kreñvoc'h c'hoazh hag ar ger « holl ». Evel henn e komzor a « niveroù kevan » er jedoniezh, pe eus keal « arz kevan » Wagner, bet meneget ganimp en unan eus hon niverennoù<sup>3</sup>. Evit *holc'hiñ* zo liammet ouzh ar ger « hemolc'hiñ » ; un doare chaseal, n'eo ket etrezek ur preizh da lazhañ met d'ur ouiziegezh da ziraez. *Kevan* eo enta ar *c'hevanolc'h* ha lusket gant ur pal gouiziegezhel. Ha neuze ez adkavomp ivez an hevelep lusk, an hevelep lañs e voe hini an universitedoù, o c'houzout e lavaromp en un doare disheñvel an hevelep jestr : an universited a breder a-zivout an traoù hollvedel (*universitas rerum*), evel m'en graj marteze ur studier eus hon c'hevanolc'h, a breder a-zivout an traoù kevan. [...]

Gwendal Piégais

<sup>3</sup> Sl. Malo Aduex, « Dre al lusk, al lavar hag ar gerzenn (*sic*) », in *Nidiad*, niverenn 3, Gouere 2010, Naoned, p. 12.

# NIDIAD

---

*Kelaouenn lennegel trimiziek.*

Kadoriad : Gwendal Piégais  
Sekretour : Malo Adeux  
Teñzorier : Hoel Mahe

**NIDIAD BREIZH**  
**33 straed Lorraine**  
**44000 NAONED**

Kasit ho chekennoù e gourc'hemenn **NIDIAD**.

Priz reol : 5€  
Koumanant bloaz, Frañs : 15€  
Koumanant bloaz, broioù all : 16€  
Studierion, dic'hweleion : 12€  
Aozadurioù sevenadurel, levraouegoù, kevarzheoù ha strollezhoù : 21€



*Darempred :*

**nidiad.gwe@gmail.com**

